



Kantik Noz Nedelek

D'an anternos, d'an heur-ma (1) o pob fidel
 E-tiskennas an Doue-Den davedomp,
 Evit lamet ar pec'hed orijinel
 Ha gant he Dad kaout pardon evidomp.
 Ar bed a bes a drid gant an esperans
 En noz eürus a ro deomp eur Zalver.
 Pobl, d'an daoulin! Var c'hed eus ho telivrans!
 Noel! Noel! Ganet eo ho Salver!

Hor feis kristen, eur sklerijen lugernus,
 Or blein var eün da graou ar G'hrouadur,
 Evel gueach all eur stereden burzudus
 A gasas di tri Roue desket ha fur.
 Roue ar bed-oll zo ganet en eur c'hraouig!
 Tud vras ar bed, eus ho kalloud ken fier,
 Doue doc'h ourgouill a goms eus he gavelig!
 Stouit ho pen dirag Doue, ho Salver!

Gant hor Zalver eo torret hor chadennoù,
 An douar zo lib, ar Barados digor!
 Ar garantas a stag gant he liamou
 An den gant Doue: breur eo d'he Redemptor!
 Eles, kanit meuleudiou da Zoùe;
 'Vidomp e teu da veva, da velver!
 Tud oll var zao! Kanit oll ho liberte!
 Noel! Noel! Mil bennos d'hor Zalver!

(1) Ma ve kanet ar c'hantik-ma en eur mare-all e ve gallet lavaret: d'an heur-ze.

"Minuit, chrétiens..." en langue bretonne